

G W E R Z

War sujet ar Separation deuz an Iliz hag ar Gouarnamant

Ton : *Ker-Iz.*

1

Roet Drinded zakr me ho ped
Eur gwir sklerijen d'am spered
Da ziskleria al lezen garo
'Zo great barz ar Franz en peb bro

2

Darn ar c'hannaded en Pariz
N'em digristenet en peb giz
Na c'houlennont ket ar gwir Doue
Nag e zervicherien ive.

3

Er bloavez pemp-var-naontek-kant
'Zo great eul lezen chenchamant
En Pariz gant ar c'hannaded
Ar C'honkordat a zo torret.

4

Eun akord pa oa meurbed great mad
Etre ar Pab Santel hon Tad
Ha Bonapart-Napoleon
Eul lezen leal ha gwirion.

5

Peb iliz, Eskob, peb beleg
An holl Gristenien asuret
A oa lezet holl en frankiz
Da zervija Doue n'o c'hiz.

6

D'an dud a iliz oa akordet
Beb bloaz paëmant asuret
'Vit ma c'hellchont en em vevo
Derc'hel peoc'h ha gwir feiz 'n hon bro.

7

Mez breman ar Framasoned
Eneb da Zoue kounaret
'Deuz torret ar C'honkordat-ze
Ha great n'e blas eul lezen nevez.

8

Goude ma devez chaseet
Deuz Franz ar relijiuzed
Troet o deuz ive o malis
Breman var an dud a iliz.

9

13

C'hoaz na vo ket mestr asuret
Da gelen na prezeg bepred.
An Aotrou maer a vezo
Mestr an iliz euz ar parreziou.

14

Eneb c'hoant ar maer asuret
En iliz na vo ket oferennet
Great na badiziant nag eured
Nag interramant en iliz great

15

Pa garo d'ar maer a vezo
Kaset d'ar vered ar c'horfou
Heb na kroaz na kloc'h na beleg,
Na peden gristen ganto great.

16

Ar gristenien vo c'hoaz nec'het
Pa c'hefen d'ar zul d'an oferen-bred
Pa vo avechou d'ezo lavaret
Hirio na vo ket oferennet

17

Ar beleg d'ar maer na blijo ket
Mez goude kreizteiz a vo great
Eur baldans ebarz an iliz
Da zidual ar iaouankiz.

18

Mar teu c'hoaz galouperien bro
'Vel a weler barz ar foariou
Da c'houlenn ouz an Aotrou maer
Ober en iliz teatr kaer.

19

Mar neuz c'hoant ar maer da feurmi
An iliz evit arc'hant d'ezo
Keit a mar karfont evit arc'hant
D'ober peb tra hudur d'ho choant.

20

Setu an iliz benniget
Dre peb seurt pechejou mastaret
Ha blasfemmet hano Doue
Ebarz an iliz noz ha deiz.

25

Neuz ket eur maer ebarz ar vro-ma.
A leuskfe ober kement-se
Pe e c'heo an den kounaret
Enepe da Zoue asuret

26

Ar maerou-ze asurramant
A blijo d'ar C'houarnamant
Ar maerou na refont ket-ze
'Vo torret deuz o c'harg gante

27

Ha laket maerou all n'ho flas
O rei marteze ouспен c'hoaz
Gwaska ive ar Gristenien
Pere viro ar gwir lezen.

28

Peb droajou vo varno taolet
Hag en peb giz gante gwasket
Ha var lez eun tam digare.
Voñt kaset d'ar prizon ive.

29

Setu ar gozen bulum **ZO**
Benn bloaz vo gwelet ar c'hêlou
Goude vo fin d'ar votadek
An traou-ze holl a vo barnet.

30

Mar gounid ar framasoned
Barz ar votadek da zonet,
Mar c'hredet barz ar gwirione
Prest a strako an traou goude.

31

Deoc'h breman eo da sonjal
Pa votfet mar grit vit ar fal,
C'houi vo kabiuz kenkoulz a c'hê,
Deuz ar maleuriou euzuz ze.

32

O ! ma Doue, o ! ma Zalver,
Roet din-me eur menas kaer
Pelaiet diouzimp ar maleur ze
Ha roit d'eomp ar peoc'h a neve.

Ar C'honkordat a zo torret.

4

Eun akord pa oa meurbed great mad
Etre ar Pab Santel hon Tad
Ha Bonapart-Napoleon
Eul lezen leal ha gwirion.

5

Peb iliz, Eskob, peb beleg
An holl Gristenien asuret
A oa lezet holl en frankiz
Da zervija Doue n'o c'hiz.

6

D'an dud a iliz oa akordet
Beb bloaz paëmant asuret
'Vit ma c'hellchont en em vevo
Derc'hel peoc'h ha gwir feiz 'n hon bro.

7

Mez breman ar Framasoned
Eneb da Zoue kounaret
'Deuz torret ar C'honkordat-ze
Ha great n'e blas eul lezen nevez.

8

Goude ma devez chaseet
Deuz Franz ar relijiuzed
Troet o deuz ive o malis
Breman var an dud a iliz.

9

Lammet o deuz ive o faë
Da brezeg n'o deuz ket librente
Mar lavaront traou na blij ket
Raktal d'al lez-varn vezint kaset.

10

Ha koulskoude ar beleg mad
Henk ober atao e c'hlead
Pe gant Doue a vo barnet
Hag erfin en ifern taolet.

11

Setu 'ta petra c'hoarvezo
Gant gwir beleien hon bro
Kement rai brezel d'ar visiou
A vo kaset d'ar prizoniou.

12

Mez mar chom eur beleg n'hon bro
Da zervicha ar parreziou
An iliz renk feurmi neuze
En hano ar barrez ive.

Neb na kroaz na kroch na beleg,
Na peden gristen ganto great.

16

Ar gristenien vo c'hoaz nec'het
Pa c'hefen d'ar zul d'an oferen-bred
Pa vo avechou d'ezo lavaret
Hirio na vo ket oferenet

17

Ar beleg d'ar maer na blij ket
Mez goude kreizteiz a vo great
Eur baldans ebarz an iliz
Da zidual ar iaouankiz.

18

Mar teu c'hoaz galouperien bro
'Vel a weler 'barz ar foariou
Da c'houlouez an Aotrou maer
Ober en iliz teatr kaer.

19

Mar neuz c'hoant ar maer da feurmi
An iliz evit arc'hant d'ezo
Keit a mar karfont evit arc'hant
D'ober peb tra hudur d'ho choant.

20

Setu an iliz benniget
Dre peb seurt pechejou mastaret
Ha blasfemmet hano Doue
Ebarz an iliz noz ha deiz.

21

Ar c'hloerdi a vo ive zerret
Penoz eta neuze vo great
Da ober beleien nevez
E plas ar re a zo brema?

22

Hag ar paour-keaz klanvour neuze
Prest da vervel var e vele
Neb lec'h eur beleg na gavo
Da gas d'ean zakramantchou.

23

O! ma Doue pebeuz eston
Pebeuz glac'har zo em c'halon
En kalon peb kristen ive
Gwelet ober traou evelse.

24

Kalz a dud a zeuio da lavaret
Kement-se na erruo ket
An traou-ze n'int nemed kojou
Birviken ze na erruo.

Gwaska ive ar Gristenien
Pere viro ar gwir lezen.

28

Peb droajou vo varno taolet
Hag en peb giz gante gwasket
Ha var lez eun tam digare.
Voint kaset d'ar prizon ive.

29

Setu ar gozen bulum *Z O*
Benn bloaz vo gwelet ar c'hélou
Goude vo fin d'ar votadek
An traou-ze holl a vo barnet.

30

Mar gounid ar framasoned
Barz ar votadek da zonet,
Mar c'hredet barz ar gwirione
Prest a strako an traou goude.

31

Deoc'h breman eo da sonjal
Pa votfet mar grit vit ar fal,
C'houi vo kabluz kenkoulz a c'hê,
Deuz ar maleuriou euzuz ze.

32

O! ma Doue, o! ma Zalver,
Roet din-me eur menas kaer
Pelaiet diouzimp ar maleur ze
Ha roit d'eomp ar peoc'h a neve.

33

Gret ma teuio an holl dud en Franz,
Krenv n'ho lezen stard n'ho toujans,
Ma teuio o c'holl enebourien
Da zistrei ouzoc'h mad a grenn.

34

Goulen ran dre ar Gristenien
A zo ho kwir zervijerien
Ar c'hras ma vo ar peoc'h roet
D'an holl Gristenien war ar bed.

35

Ha neuze goude hon maro, [vou,
Roet deomp ar c'hras da vont d'an En-
Goulen ran dre hano Jezus
Dre hano maro e truezus.

FIN

*Rimet gand Juluan GODEST, ha
lakeat e iez Leon gant AR GALL.*

Tous droits réservés.

KANTIK

Da enebi euz an Ivanteriou en Ilizou

DISKAN : *Ho komjou ar bobl. Ton diez war beder linen.*

DISKAN

1

Biken ganeomp na vo lezet,
Priza traou 'n iliz binniget,
Beteg an heur ma vemp forset
Dre lezen ar framasonnet.

2

Hirio aman ounp n'em vodet
Oll evit d'ezê lavaret,
Na zeuit ket da vastari,
'N iliz zavet d'hon Doue ni.

3

Ilis Doue ar Gristenien
Zo a viskoaz, vo da vinken,
Mest kement tra ha krouet,
Rag un de kont, dezan renfet.

4

Hon dever ni, breman zo great,
Peo dre lezen omp oll forset,
C'hui a responto deuz a ze,
Da virviken dirag Doue.

5

O ma Doue pebeuz esklam
O velet an iliz, hon mam,
Dre holl ar Franz eo gwall gaset

7

Ilizou ganeomp ni zavet
Pe gant hon zud koz asuret,
A ben pemp bloaz asuramant
E vezint d'ar Gouarnamant.

8

En mil nao c'hant c'houec'h asuret,
Traou peb Iliz a vo prizet,
Ha goude bep bloaz asuret
Paea diwarnho a vo red.

9

Biskoaz den na deuz war ar bed
Eur seurt lezen na deuz gwelet,
Paea diwar an Ilizou,
Na diwar an traou zo eno.

10

C'hoaz ar pezh ma rent glac'haret
An traou zakr deuz ket espernet,
Balamour da ze a koe,
War pobl ar Franz, gwall darvoudou.

11

Baltazar gwechal ive
Zisprizaz an traou zakr en deiz,
E dud hag hen a oa lazet,

13

Gant buanegez Doue,
Holl a vemp glac'haret neuze,
Rag kalz anduro ar maro,
Dre holl en Franz vo trubuillou.

14

Re divea vemp asuret
Pa vemp gant dorn Doue skoet,
Breman eo dimp chench a vue
A goulen pardon euz Doue.

15

Ober peb den deuz e welan
Trei diwar ar Franz ar walen man,
Pa vimp holl demeuz hon c'hoste
Doue rei d'eomp ar peoc'h neuze.

16

O! ma Doue holl galloudek
Mest oc'h da galon tud ar bed,
Gret ma vemp holl nem unanet
D'ho chervicha ha d'ho karet.

17

Gwerc'hez Vari, Zent hag Elez
Pedet evidomp ar gwir Doue,
Da drei diwarnomp Gwaler.nou,
Da rei d'eomp graz da vont d'an Envou.

4

Hon dever ni, breman zo great,
 Peo dre lezen omp oll forset,
 C'hui a responto deuz a ze,
 Da virviken dirag Doue.

5

O ma Doue pebeuz esklam
 O velet an iliz, hon mam,
 Dre holl en Franz eo gwall gaset
 Ziouaz, gant ar framasonnet.

6

Diouthi int en em zistaget,
 Ha c'hoaz o devez hi barnet,
 Da bea bep bloaz droajou
 Divarnhi, divar he madou.

10

C'hoaz ar pez ma rent glac'haret
 An traou zakr deuz ket espernet,
 Balamour da ze a koe,
 War pobl ar Franz, gwall darvoudou.

11

Baltazar gwechal ive
 Zisprizaz an traou zakr en deiz,
 E dud hag hen a oa lazet,
 E rouantelez dismantret.

12

Laket evez tud a lezen
 Rag dorn Doue zo uz d'ho penn
 Ha pa vo ar muzul laret,
 C'houi hag ho pobl vo gwall gwasket.

O! ma Doue holl galloudek
 Mest oc'h da galon tud ar bed,
 Gret ma vemp holl nem unanet
 D'ho chervicha ha d'ho karet.

17

Gwerc'hez Vari, Zent hag Elez
 Pedet evidomp ar gwir Doue,
 Da drei diwarnomp Gwaler.nou,
 Da rei d'eomp graz da vont d'an Envou.

FIN

Tous droits réservés.

